


(Enoch arden)



KENVREURIEZ AR BREZONEG

KAIEROU KENVREURIEZ AR BREZONEG.

SEIZVED BLOAVEZ.

(40-41-42-43-44)

Niverenn 44.

1) Piou oa an Aotrou Cozanet?

2) ENOCH ARDEN, gand Gwennael.

Mignoned ha lennerien ker...

Gand an niverenn-mañ, gouestlet d'an Aotrou Cozanet, eh echu ho koumanant da "Gaierou Kenvreuriez ar Brezoneg".

Fiziañs on-eus e kendalhoh evet araog da zigas deom ho skoazell hag ho sikour.

Staga reom goudeze adarre gand eur rummad nevez a bemp niverenn hag ho pedi a reom da renevezi ho koumanant (25 f).

Evid ma hello ar brezoneg beza en e renk hag en e blas ive el liderez a hirio, bezit eur houmananter fidel d'or gelaouenn, grit implij euz an troi digeziou ha sikourit ahanom hervez ho kalloud.

*Bennoz ha trugarez deoh
ha Bloavez Mad.
gand yehed ha levene
ha warnoh oll Bennoz Doue.*

Kenvreuriez ar Brezoneg. J.S

Evid kement-tra a zell ouz" Kenvreuriez ar Brezoneg" (Koum. 25 lur), her goulenn digand:

an Aotrou Job SEITE, Skol an Aod, 29249 GUISSENY

CCP 1738-66 RENNES

Kavoud a reoh azaleg bremañ:

- 1°) "Levr-Overenn" ... 35 lur
- 2°) "Komz Doue en Overenn" Levr T... 30 lur
- 3°) "Komz Doue en Overenn" Levr A, B, C... Pebhini 20 lur
- 4°) "Ar Briedelez" ... 8 lur
- 5°) "An Nouenn" ... 8 lur
- 6°) "Cantiques Bretons du Diocèse de Quimper et de Léon" ... 35 lur
- 7°) "Kroaziou Keltieg" (Bleun Brug)... 3 lur
- 8°) "Overennou evid an Anaon" ... 8 lur
- 9°) "Overennou en enor d'ar Werhez" ... 8 lur
- 10°) "Sakramant ar Vadiziant" ... 8 lur + mizou kas.

TRoidigeziou aotreet da arnod evid an eskobti a-berz an Aotrou F. BARBU, eskob Kemper ha Leon.

KEMPER, d'an 25 a viz kerzu 1976

Visant FAVE, eskob skoazeller.

Piou oa an Aotrou Cozanet ?

Evid kalz ahanoh marteze eo dianav, daoust m'en-eus bet skrivet kalz e brezoneg.

Gwenmael oa ano barz an Aotrou Cozanet, beleg.

Ganet e Sant Martin Montroulez d'ar 7 a viz du 1875, e varvas e Kastel-Paol d'an 21 a viz du 1946. E gorv a zo bet sebeliet e bered Kerlouan.

Gwerzacuier, kaner, musiker eo bet. Savet en-eus kalz traou kaer e brezoneg: kanaouennou, kantikou, rimadellou, fablennoù, peziou-c'hoari. Eul lodenn anezo a zo bet embannet gant an Aotrou Chalon F. Falc'hun, kelenner e skol-Veur Brest, en eul levr, dindan an ano: "va fennngennig e liorz Breiz-Klotennou brezoneg." Kalz skridoù all a zo chomet diembann betek-heñ ha dreistoll eun droidigez e gwerzioù brezoneg euz eun danevell saozneg: "Enoch Arden" savet gant Lord Tennyson e 1864. Digand Visant Seitê em-eus bet an dorn-skrid euz an oberenn-se on-eus hirio ar blijadur hag an enor da embann e kaierou kenvreuriezh ar Brezoneg. Fromuz kenañ eo dija an danevell heñ-unan, fromusoh ha kaeroh c'hoaz e kavoh anezi sur oun, e brezoneg, gant lusk ar gwerzennou, kaerder ha pinvidigez ar yez.

Deuet da veza dall e fin e vuez, Gwenmael a gendalhas, evel Sant Herve, da gana, evel eun eostig, kaerder ar grouadelezh, da lakaad da dridal ha da seni kerdin telenn aour an Arvor. Selaout anezañ kentoh er varzoniezh a gavoh amañ warlerh.

An eostig, er c'hoad don,
a gan pa deu an noz;
Me gan ive, ha me deut koz,
n'eus mui a skêrder evidon.

Eostig deuet eo an noz,
war an draonienn ha war ar roz.

Kan, eostig kaloneg,
O barzig an evned !
Me gan evid ar Vretoned,
en o yez kaer: ar Brezoneg.

Eostig deuet eo an noz,
war an draonienn ha war ar roz.

Enoch arden

Roudennadou torr-aod, en o foull o koueza,
O doa lezet digor eun islonk; ha beza
'Oa bremañ en islonk eonenn ha traez melen
E lec'h ne oa araog nemed roc'h ha tevenn.
Pelloc'h war eur c'hae striz, tiez martoloded,
Gand o zoennou ruz e teol, a zo bodet;
Neuze eun iliz koz, diwisk he mogerious;
Uhelloc'h eur straed hir a sao d'an douarou
Beteg eun dourell deo a ra milin-avel,
Hag a-dreñv, larkoc'h c'hoaz, e weler eur grugell
Savet gant an Daniz, en amzeriou gwechall;
Hag an tevenn bremañ a ziskenn en tu all
Da vond d'eur c'hoad kelvez, o c'hlaezezi d'an traoñ,
Darempredet d'ar c'houlz gant ar glaskerien graoñ,
En eur c'hleuz hag a zo e doare eur gibell
Savet war e leziou, he diabarz izel.

El lec'h-mañ, war an aod, tri vogel a dri di,
Bremañ ez eus kant vloaz, a gave o dudi;
Eur plac'hig ha daou baotr: Anna I¹, da genta,
Euz oll verc'hed bihan ar porzig ar goanta;
An eil oa Philip Ray, lezarvet ar pennher,
Rag n'oa mab nemetañ e ti ar miliner;
Hag an trede, Enok Arden, eun emzivad,
E-noa, siouaz! en eur peñse, kollet e dad.
Diaro'henn war an aod, o zri e c'hoarient
(An êzenn-vor a zo ken yac'huz d'ar skevent)
Etouez ar rollajou kerdin, ar rouejou
Hag an eoriou merglet, hag o-zri a-wechou
E pignent er bigi kostoziet war ar sec'h
Hag e raent tro ar bed heb finval euz al lec'h.
Bremañ war an traez gleb e savent o c'hastell,
A vije diskaret gand ar mor o sevel.
En eur ambroug an tarz o voned war e giz,
Hag o tec'houd buan pa zired gand tiz,
War an traez boug bemdez e lezent o roudou
Hag a veze skubet bemdez gand ar c'hoummou.

A zindan an torr-aod eur vougeo oa digor;
 Eno ar vugale, en disheol, er goulder,
 A c'helle pa gariant, c'hoari tiegezig.
 Anna Li a veze atao ar vestrezig;
 Med evid ar boatred, oa disheñvel an traou:
 Ren a raent peb eil tro, eun deiz hebken war zaou.
 Hogen Enok, kreñvoc'h hag hardisoc'h ive,
 Ne leze ket ar stur d'e dro gand egile;
 "An ti-mañ, emezañ, oe va zi, va zi me,
 Annaig eo va gwreg." - "Va hini me ive",
 A lavare Philip o tiroll da leñva.
 "Da beb hini e dro" med n'oa ket ar c'hreñva.
 "Me am eus kas ouzit, Enok, ya kas kenañ."
 Ar plac'hig a glaske lakaad ar peoc'h en ti:
 "Me vezo gwreg vihan d'eoc'h ho taou, emezi,
 En em glevit, m'ho peus evidoun karantez."
 Hag e ouele ive gand Philip dre druez.
 An amzer a dremen hag ar bed a vale;
 Bremañ Philip, Enok, ne oant mui bugale.
 Evel ma kresk ar c'hor dre m'ac'h astenn an deiz
 Gwrez c'houek ar yaouankiz a greskas en o c'hreiz,
 An eil hag egile neuze 'droas o zell
 War-zu ar plac'h yaouank anavezet bugel.
 Enok a zisklerias d'ezi e ganratez
 Med Philip he c'harie, heb komz, dre lentegez.
 Emañ a seblante plijoud muioc'h d'ezi,
 Med war youl ar galon ar skiant a fazi:
 Enok eo a garie heb gouzoud, ha nac'het
 He dije hen ober m'ho piñe goulennet.
 Enok n'e-noa bremañ nemed eur pal: gorrenn
 E oll hounidegez evid beza perc'henn
 D'eur vag en e ano hag evid sevel ti
 A-benn deiz o eured, evitañ, eviti.
 Neuze ec'h oberias ken brao ma'z eas e vrud
 War gresk a zeiz da zeiz; n'oa ket hervez an dud
 A-hed meur a leo aod, evid derc'hel ar stur,
 Pesketour par d'ezañ, ken hardis ha ken fur.
 War eul lestr a genwerz bloaz a-bez e oa bet
 Ha deut oa da veza eur martolod touet;
 Teir gwech e-noa miret e vuhez d'e nesa,

Euz a greiz an tonnou a venne e lonka.
 Ne gave 'ta nemed mignoned war e hent.
 N'e-noa ket c'hoaz tizet e vloavez war-n ugent
 M'e-noa prenet e vag ha peursavet he zi,
 Koant evel eun neizig er goudor, d'Anna Li,
 Hanter hent war ar straed a gase d'ar vilin,
 Pa zistroas, evid ar yaouankiz lirzin,
 An deiz goude an eost, da vond d'ar c'hraon kelvez,
 Peb hini a gavas, da lakaad e frouez,
 Eur zac'h pe eur baner hag a redas d'ar c'hoad.
 Hogen Philip a oa chomet war-dro e dad
 E-noa, o veza klañv, ezomm euz e skoazell;
 Eun eur dale e-noa pa bignas d'ar grugell.
 Philip a ziskennas buanna ma c'helle...
 Hogen eün dirazañ, dres evel ma selle
 E diribin ar c'hoad a douez en izelenn,
 E welas, azezet war lez eur wenojenn,
 Anna Li hag Enok, levenez war o zal.
 Philip Ray a lennas e donkadur ragtal:
 He dorn oa en e zorn, he sell oa en e sell;
 Dremm Enok skarnilet gand ar mor, an avel,
 A oa kaer da weloud evel n'oa bet biskoaz
 Kement a eürusted a laka kemm er gwaz.
 P'o gwelas tal ouz tal, ne c'hellas mui padoud
 Hag o tistrei e benn e lezas eun hirvoud.
 Philip gouliet oll dindan e galonad.
 Evid gouela e kuz a sankas don er c'hoad
 Hag eno e chomas beteg na glevjet ken
 Safar ar yaouankiz. Neuze ar paourkaez den
 A savas en e sav, a zistroas d'e di,
 O tougen en e greiz, eun naon n'hellfe terri
 A-hed e oll vuhez, keid m'he dije padet.

 Anna Li hag Enok 'voe eta eureujet.
 Ha, lirzin en o zour, ar c'hleier a zonas;
 Ar bloaveziou eüruz war-lerc'h a dremenas,
 Seiz bloavez a yec'hed, a joa, a garantez,
 Distag diouz an ezomm el labour a vemdez;
 Gand bugale ive, da genta eur verc'hig,
 Gand leñvadou genta e genta bugelig

E startaas ennañ ar soñj vad da viroud
 Kement gounidegez a oa en e c'halloud
 Ha rei d'ar bugel-se gwelloc'h deskadurez
 Eged n'o devoa bet en hag ar vamm nevez.
 Eur youl adnevezet, daou vloavez all war-lerc'h
 Pa deuas er c'havell eur mab goude ar verc'h
 Evid beza didu e vamm, he unan kaer,
 Pa vije war ar mor Enok ar pesketaer,
 Pe c'hoaz o redeg hent da werza e besked;
 Rag kazeg wenn Enok a oa anavezet
 Gand an oll, nann hebken beteg kroaz ar marc'had
 Med adreñv an tevenn, e-lec'h ma red ar c'had
 A-dreuz an henchou glaz, ha beteg ar c'hastell
 E-neus evid gedour, dirag e borrastell,
 Eul leonig maen-ben; beteg an ivinenn,
 Touzet e furm eur peñn, hag a wele an den
 O tond, gand e baner ozil gwenn, peb gwener,
 Da ginnig e besked d'aotronez ar maner.

Neuze e tigouezas eur c'hemm en e vuhez,
 Rag an traou, er bed mañ, zo berr o fadelez.
 Tost da bemp leo en Nord d'ar porzig bihan-mañ
 E tigore eur haor ledannoc'h, ha d'ezañ,
 E oa boazet Enok da vond beb an amzer
 Dre zouar pe dre vor evid traou e vicher.
 Hogen, eur wech eno, riklet e-noa heb mar,
 E kouezas diouz eur wern hag e torras e c'har;
 Hag epad ma chomas astennet, en o zi,
 E bried a deuas c'hoas da wilioudi
 Euz eur bugelig gwan; ouspenn eur c'hevezer
 A oa deut d'ober gaou outañ en e vicher
 O tilarmoud digand e wreg, e vugale,
 Ar bara ne c'helle mui gounid; heb dale
 E c'hellfent beza oll war-nez an dienez.
 Ha daoust ma 'z oa Enok eun den leun a furnez
 Hag a zoujañs Doue, ledet war e wele,
 Ar velkoni doaniuz ennañ en em sile.
 Evel epad ar c'housk en eun huñvre poaniuz,
 E kav d'ezañ gweloud e bried gwallleuruz
 Hag he bugale ger, en dienez kouezet,

Da glask an aluzenn hiviziken barnet.
 Ha neuze e pedas: "Doue trugarezuz,
 Diwallit-i, m'ho ped, euz eur stad ken truezus."
 Hag epad ma pede, mestr al lestr e oa bet
 O redeg bro warnañ, o veza bet klevet
 An darvoud e'hoarvezet, ragtal a ziredas,
 Rag prizoud a rae kalz Enok, hag e komzas
 Euz e lestr a dlie mond d'ar Chin da dreki;
 Hogen ezomm e-noa euz eur mestr merdeidi;
 "Daoust ha dond a rafe? Ober e soñj bremañ...
 "Ma oa diouz e zoare, ar garg a oa d'ezañ.
 "Araog kuitaad ar porz 'oa meur a zizun e'hoaz."
 O weloud e bedenn selaouet, laouen braz,
 Enok n'oe ket nec'het hag e roas e c'her.
 Enok, bremañ pare, a zistroas seder
 Rag ar reustl ne oa bet evito netra 'n oll
 Nemed eur goumoulenn o tremen war an heol
 Hag a deu da deuzi dindan nerz e vannou.
 Koulskoude e bried hag e vugaligou
 Pa vije aet a bell... Petra 'oa mad ober?
 E benn en e zaouarn e soñjas pell amser...
 Lakaad e vag e gwerz? hi a brize kement!
 Morse n'en dije bet soñjet a-ziagent.
 Da bed barrad avel, war ar mor e kounnar,
 O devoa dalc'het penn o daou?... Enok he c'har,
 Enok he anavez evel m'ac'h anavez
 Ar c'havalier ar marc'h hen doug en hent bemdez.
 He gwerza daoust da ze?... Neuze gand an arc'hant,
 Prena marc'hadourez evid Anna: e c'hoant
 A ve sevel d'houmañ eur stalig en he zi,
 E kichenmig ar porz, a ve kavet enni
 Kement tra a zo red evid an dud ar vor
 Hag evid o gwragez; hi a zalc'hfe an nor
 Epad ma vije eñ, he gwaz, o redeg bro.
 E-unan e raio kenwerz du-hont, d'e dro;
 Ober diou pe deir gwech an treiz braz ha diou red
 Aliesoc'h zoken, an dra vije gwelet;
 Dond en dro pinvidig, kaoud neuze brasoc'h bag
 Rak ar c'hounidegez ouz ar vent a zo stag,
 Rei deskadurez vad bremaig d'e vugale:

Ar soñjou-se, Enok, en e benn o male.
 Ha pa deuje an oad, er gêr, gand e bried,
 E c'hedje pred Doue, er peoc'h, en eürusted.
 Enok skañv adarre, pare mad euz e zroug
 A welas war an hent o tond d'e ziambroug,
 Anna e wreg karet, gand he bugelig gwan.
 Hi, e divrec'h e dad-hel lakaas he-unan,
 Hag Enok a bokas d'ezan gand karantez.
 Goude e tibouezas ar paourig gand truez
 Hag e flouras d'ezañ e izili dister
 Evel ma ra eun tad d'e grouadurig ker.
 N'en doe ket ar galon da gomz euz e ratoz
 Ragtal o tigouezoud med goude, antronoz,
 E komzas euz e youl da vond d'ar broiou pell.

Morse o youlou c'hoaz ne oant bet disheñvel
 Abaoe ar mare ma lakaas war he biz
 Ar walenn aour eured, da zeiz o yaouankiz.
 Hogen, hirio, Anna o klevoud ar c'helou
 Hen erbedas kement, gand eur mor a zaerou,
 Ma teuas e galon da enkaad en e greiz.
 Ha perag he c'huitaad gand he bugale geiz
 Evid mond da redeg ar mor pell diouz e vro;
 Aon he doa, sur he oa, ne deuje ket en dro.
 Med Enok he lezas d'erbedi en aner.
 Daoust m'e-noa eviti eur garantez dener,
 Rag e soñj oa graet mad, red oa e gas da benn
 Ha netra ne c'hellfe bremañ e ziarbenn;
 N'eo ket gand plijadur e felle d'ezañ mond,
 Nann, e breder a oa gand an amzer da zond.
 Neuze gand geriou kaer e klaskas frealzi
 Kalon baour e bried, ken buan d'enkrezi:
 "Perag krena kement heb abeg mad ebed?
 "Kaoud fizians e Doue a sell ouzom bepred."

Gwerzet gantañ e vag, mignonez koz ar mor,
 Enok a zo bremañ kalvez, hag e klevor
 Gantañ trouz an eskenn, ar vouc'hal, ar morzol
 Hag an talar er c'hoad: n'eus ket amzer da goll.
 Lakaad a ra an oll ijin 'zo en e gerz

Da ober euz eur gambr, en o zi, eur stal-werz
 D'he leunia a zavez hag a varc'hadourez
 Ha kement tra zo red 'vid ar besketerez.
 Epas an amzer-se, Anna 'seblant d'ez
 Emaor oc'h ober eun arched eviti.
 Peb tra 'oa lakaet en urz vad war ar staliou
 Meur a renk anezo a-hed ar mogerioù.
 Al lec'h o veza eñk, lakaad an traou kempenn
 Evel had er vlevnienn ha piz en o c'hloenn.
 Enok en dije graet goab ouz an huñvreou
 Hag an enkreziou-se n'int nemed sorc'hennou
 Ma ne vijent ket bet eur boan evid Anna.
 Bremañ e galon baour oa dare da ranna;
 Med o veza lakaet e oll fiziañs en Neñv
 An devez diweza e gavas sonn ha kreñv.
 Neuze o taoulina e reas eur bedenn c'houek
 Evid goulenn bennoz an Aotrou war e wreg
 Ha war e vugale epad ma vije pell:
 "Doue trugarezuz roit d'ezo skoazell
 "C'hwit a gemer preder gand ho krouadurien."
 Neuze, en eur zevel, laouen e lavaras:
 "Anna, dre c'hras Doue, sur oñ ni welo c'hoaz
 "Devezioù kaer, eüruz, goude 'n amzer galet.
 "A-benn ma vin distro dalc'hit tomm an oaled
 "Rak amañ e veziñ pa soñjoc'h nebeuta."
 Neuze ouz kavelig ar bugel e tosta:
 "Rag emañ, emezañ, ar paourkaez bihanig,
 "Teñzor munut e dad, va aelig, va oañig,
 "Bennoz Doue warnañ, rag kerkoulz e garan,
 "Ha muioc'h, dre ma 'z eo ken dister ha ken gwan.
 "Pa deuin-me d'ar gêr e vo war va daoulin,
 "Gand istorioù fentuz m'hel lako da c'hoarzin,
 "Me zigaso d'ezañ ar c'haera braoigou
 "Euz broioù ar Reter, leun e zaouarnigou.
 "Kalon, Anna! Kalon! araog ma 'z in en hent,
 "Ha bezit laouennoc'h dirazoun evel kent."

Anna e selaoue, hag epad ma komze
 O weloud e fizianz he doa fizianz ive.
 Med pa gomzas da vad, neuze n'hen heullias ken,

Ha ne ouie petra a lavare an den;
 Heñvel oa ouz ar verc'h a deu gant he fod dour
 D'e garga d'ar stivell; beuzet en he soñj flour,
 E sell ouz ar pod leun: an dour a ruill da goll
 Ha ne wel ha ne glev netra, dievez oll.
 Ha neuze e komzas: "O Enok c'hwi 'zo fur,
 "Med daoust d'hoc'h oll furnez, koulskoude me zo sur,
 "Ne welin mui ho tremm." -- "Mad-tre, eme he gwaz.
 "M'em eus, ouz hoc'h hini, soñj mad da selloud c'hoaz.
 "Al lestr ma vin warnañ, Anna, a-wel d'hon ti
 "A dle tremen... (an deiz a lavaras d'ez) i
 "Gand eul lunedenn-vor e-neus an amezog
 "C'hwi a c'hello gweloud eur wech c'hoaz, hoc'h Enok."

P'oe deut ar pred da vond ha da gitaad an ti,
 Krog e dorn e bried e lavaras d'ez i:
 "Beilh war ar vugale, dalc'h an traou en urz vad,
 "Evel e bourz eul lestr renket brao d'al lagad.
 "Bez kreñv ha na ouel ket, rag red mad eo d'in mond,
 "N'az pezh ket a enkrez 'vid an amzer da zond.
 "Pe ma teu d'it enkrez, stag da vag ouz Doue;
 "An eor-se a zalc'h mad; daoust ha n'eo ket Roue
 "E broiou ar sav-heol evel broiou-mañ?
 "Hag o tec'houd du-hont n'hellan kuzad outañ.
 "Ar mor a zo d'ezañ. Eñ e-neus e grouet,
 "Ha kement tra a vev, dirazañ 'zo stouet."

Ha neuze, o sevel, Enok a vriatas
 E wreg prest da sempla, ha beb eil e pokas
 D'e verc'h, d'e vab-hena, a zelle souezet
 Ouz o mamm hag a oa en he daerou beuzet.
 Evid an hini klañv, kousket en e gavell
 Goude eun nozvez fall, pa glaskjod e sevel
 Enok a lavaras d'Anna: "Nann, na rit ket,
 "Re vihanmig eo c'hoaz, n'en dezo soñj ebed."
 Hag e pokas d'ezañ ive en e gavell.
 Med Anna, o tostaad ouz e dal, he bugel,
 A droc'has eur guchenn euz a vleot an aelig
 Hag her roas d'an tad e koun euz o mabig.
 "Kenavo, emezañ d'e wreg, d'e vugale."

Ha diouz o gwel, Enok a dec'has heb dale.
 D'an deiz, hervez Enok, ma tlie dond al lestr,
 Anna oa war evez, digor braz he frenestr.
 Gweloud a reas emañ gand he daoulagad noaz
 Med kaer he doa ober, ne welas ket he gwas.
 N'eo ket evid lakaad ar werenn ouz he sell?
 Pe marteze he dorn a gren ouz he derc'hel?
 Aezenn zo war ar gwer, he lagad a zo gleb?
 Eun dra bennag ganti a c'hoari en eneb?

Epad an amzer-se, he fried war ar pont
 'rae d'ezi sinadou n'o doa ket a respont.
 Anna li da selloud pebl amzer a chomas:
 Ar pried hag al lestr siouaz a dremenaz.
 Klozet prenestr he c'hamb, he c'halon baour e kaoñ,
 En eur ouela doureg e tiskennas d'an traoñ.
 Daoust ma keuzie d'he gwaz evel eun den maro,
 Azaleg an deiz-mañ he wreg a zigoro
 Da senti ouz e youl he stal marc'hadourez;
 Hogen ar vaouez paour ne oa ket gwerzerez,
 Divoaz diouz an eskemm, heug he doa ouz ar gaou,
 Ne ouie ket meuli talvoudegez he zraou,
 Na sikour gand he biz ar poueziou er bladenn.
 Da veza pounneroc'h evid o laeradenn,
 Na da c'houlenn muioc'h eged n'oa deread,
 Evid rei da c'houde an traou gwelloc'h marc'had.
 Ha klask a rae gouzoud ar pezh a lavarje,
 Euz he doare ober, he fried, ma ouije.
 Aliesig, zoken, pa veze treut ar yalc'h
 He doa gwerzet war goll evid debri d'he gwalc'h.
 Ar stal 'yae da stalig hag Anna her gouie
 Hag e melkoni vraz muioc'h mui e veve.
 Gand tri vugel yaouank he stad ne oa ket brao,
 Ha kelou euz Enok ne devoa ket atao.
 Evid ar bihanig, an diweza ganet,
 Ne c'helle ket beva, d'an oll e oa anet;
 Ar soñj-se a waske kalon dener ar vamm;
 A-hed an noz war-c'hed, houmañ ne gouske tamm;
 En deiz, euz ar c'havell d'he stal ha d'he labour,
 He spered oa bepred gand ar c'haezig klavour;

Gervel ar medisin? E baea vije red...
Prena louzou? Penaoz? Ne roer ket e kred.

.....
Evel euz e gaoued, ma nij al labousig,
Pa gav digor an nor, ene glan an aelig
A nijas euz e gorv eun deiz diouz ar mintin,
Hag en neñv e voe joa ha kanaouenn lirzin.

Philip, er sizun-se, m'he doa, leun a c'hlae'har,
Anna Li, ambrouget he bugel d'an douar,
(N'en doa morse klasket he gweloud, komz outi,
Abaoe m'oa chomet heb he fried en ti)
Philip Ray a soñjas e oa deut ar mare
Da rei d'ezhi skoazell heb beza amzere.
Ne gavas den er stal a oa chomet digor.
Neuze Philip a sko tri daolig war an nor
A gas d'ar gambr a-dreñv, heb kaoud respont ebed:
"Digorom, emezañ atao, ma vo gwelet."
Skoelfet he daoulagad, he fenn war he barlenn,
Anna ouz e glevoud a reas eur skrijadenn
Hag a droas he fenn ouz kostez ar voger.
(Pa vezer er c'hlahar, diouz an dud e tec'her)
Philip a chomas sioul eur pennad, ha neuze
E lavaras d'ezhi gand eur vouez a grene:
"Me zo deut da c'houlenn eun dra euz ho krad-vad,
"Anna baour, emezañ". -- "Digand eur plac'h em stad,
"Ken doaniet, emezi, ken dilezet ha me!"
E galon truezet, ha ken lent ha ma voe,
E tostas outi, e komzas evelhen:
"Anna gaez, emezañ, o selaou va fedenn
"E sevenoc'h youl vraz Enok ho pried ker.
"D'ar gwella en on touez ho poa roet ho ker,
"D'eun den kreñv ha kalet, pa groge el labour
"Her c'hase mad da benn, ha n'en doa aon ouz gour.
"Perag mond evelse da redeg bro ken pell,
"Perag kuitaad e di, perag ho tilezel,
"C'hwil hag ho pugale? N'oa ket dre blijadur
"Rag her gouzoud a ran, Enok oa eun den fur.
"Perag neuze? Evid gounid buhez aesoc'h

"D'eoc'h, Anna, ha d'ho re deskadurez welloc'h.
 "Setu aze e youl, ma tistro en do poan.
 "Ouz ho kweloud hirio en dienez, en doan,
 "Hag euriou talvoudeg ar mintin foranet;
 "Ha m'ema en e vez d'an deiz-mañ astennet,
 "Ne garfe ket gouzoud emañ e re vihan.
 "Evel ebeulien foll o reddeg dre al lann.
 "Gweloud a rit, Anna, penaoz emañ an traou.
 "Ni en em anavez keit all a zo on daou.
 "Dre ar garantez vraz a zougit c'hoaz d'ezañ,
 "Me ho ped d'am selaou, en e ano bremañ,
 "Rag pa deuio d'ar gêr, Anna, ma 'z eo ho c'hoant,
 "E c'hellou va digoll, restaoz d'in an arc'hant.
 "Ya, ma kirit, Anna, rag me zo pinvidig,
 "Ha brao braz eo va stal, ha c'hwi zo reuzeudig.
 "Va list 'ta da lakaad er skol, ar paotr, ar verc'h.
 "Set' aze va goulenn. Ni a welo warlerc'h."

Anna, he dremm troet atao ouz ar voger
 Oa ken dinerz, ken faez ma ne venne ober
 Eur sell hebken outañ 'vid e drugarekaad.
 Neuze e lavaras: "O Philip, c'hwi 'zo mad,
 "Med Enok a zo beo, ha ne c'hellan kredi
 "Ne welo mui e wreg, e vugale, e di.
 "Eun dra bennag hen dalc'h, mad pa vo deuet d'e vro
 "E roio d'eoc'h, Philip, an arc'hant en distro.
 "An arc'hant a c'heller pæd, hogen siouaz!
 "Ar pezh ne bæim ket eo ho madelez vraz."

"Neuze, eme Philip, Anna, c'hwi am lezo?
 "Evid ho pugale, bezit soñj anezo."
 He c'halon dizammmet, Anna li gaez a c'hell,
 War zremm onest Philip bremañ teurel eur zell,
 Hag a-dreuz he daerou, 'vid e drugarekaad,
 Gervel Bennoz Doue war benn eun den ken mad.
 Philip, eüruz ive, a gimiad diouti.
 Hi a ya d'he liorz bihan e penn an ti.
 Philip neuze, d'ar skol, paotr ha merc'h a gasas
 Hag al leoriou 'zo red evito a brenas.

Bez e ra evito, daoust ma'n'int ket e re,
Kement hag ar gwir dad evid e vugale.
War-dro Anna avad, ne vez ket gwelet
Nemed a-bell-da-bell, daoust ma kave kalet
Dilezel an hini e-noa karet gwechall.
(Ret oa divenn he brud eneb an teodou fall)
Koulskoude, dre zacuarn he bugale vihan,
E kase d'ez i traou heb moned e unan.
Frouez euz e liorz, atao ar re gaera,
Ar bleuniou-rog kenta, hag ar re ziweza,
Pe eur c'honifl bennag, paket war an tevern,
Gwechou, war zigarez minutoc'h maladenn,
(Da ziwall ouz doare eun aluzenn kuzet)
Eun tamm bleud flour ha gwenn, en e vilin malet.

Kaer e-noa koulskoude ne c'helle ket anaoud
Soñjou kalon Anna, rag pa deue d'he c'haoud,
Houmañ, da lavared d'ezañ "Bennoz-Doue",
He doa kalz poan o kaoud ar c'homzou a zere.
He bugale avad, pa dremene e-biou,
A zirede d'e gaoud euz a greiz o c'hoariou.
Bez e oant ar vistri er vilin, en e di.
Dirazañ e teuent da glemm, da gunidi
Pa zigoueze beza o c'halonig e beq'h;
Hag en em stagent ouz e zae, ouz e vrec'h,
Evid beza flouret, evid c'hoari gantañ.
O daou ne raent nemed "tad Philip" anezañ.
Philip a zeiz da zeiz, a wel ar vugale,
A c'houlneze bepred hag Enok a golle;
Emañ 'oa evito dizoare ha dineuz
Evel eun dra gwelet el lugenn, pe eun teuz.
Rag abaoe deg vloaz m'e-noa kuitaet e vro
N'oa bet kelou ebed, n'oa ket bet war o zro.

Hogen, eun abardaer he bugale d'Anna
O doa goulennet mond d'ar c'hoad da gelvezia
Gand ar vugale all. Hogen pa lavaras
O mamm moned ganto, ar re-mañ 'c'houlernas
Ma teuje "tad Philip" ive, hag ez ejont
D'e glask en e vilin hag ober d'ezañ dond.

Heñvel ouz ar bleuniou, pa deu ar venanenn,
 He c'horf mistr ha mibin goloet a bouldrenn,
 Evel-ae tad Philip, euz e vilin avel,
 A deu da ziambroug, leun-bleud, an daou vugel.
 "Tad Philip! Tad Philip! deut ganeom, emezo,
 "Du-hont d'ar c'hoad kelvez, plijadur a vezo."
 -"Nann, nann, eme Philip, an avel a zo mad
 Ha va milin a dro, red eo d'in labourad."
 Med ar paotr hag ar verc'h a grog en e chupenn,
 Hag adarre Philip a blego d'o froudenn,
 Laouen, en-eur c'hoarzin, hag o soñjal ive
 E c'hellfe brao o mamm dond ganto marteze.

Ne oa ket faziet, mond a rejont eta.
 Hogen p'o doa pignet an hanterenn genta
 Euz an tevenn skuizuz, pa zeraou da ziskenn
 En tu all d'ar gribell, war-zu an iselenn,
 Anna, dialanet ha dinerz da goueza
 A lavaras: "Va list amañ da ziskuiza."
 Philip a oa chomet ganti a galon vad.
 Epad m'en em skigne ar vugale er c'hoad,
 Gand trouz ha cholori, youe'hadennou skiltruz,
 Dinec'h evel ma'z eo ar yaouankiz eüruz,
 Lod a blege eur skourr karget a vodou kraon,
 War ziribin ar c'hoad lod a rede d'an traon,
 En eur hopal a-bell an eil euz egile.

Med Philip azezet tost d'ezi, en huñvre,
 Ne wele mui Anna, bremañ en e spered
 Ec'h enñvore ar boan e-noa bet gouzañvet
 El lec'h-mañ, eun devez, pa oa aet da guzad,
 Evel eul loen gloazet, dindan gwarez ar c'hoad.
 D'ar fin e lavaras en-eur zevel e dal:
 "N'o c'hlevit ket, Anna, o c'hoarzin, oc'h hopal
 "Du-hont er c'hoad kelvez? Skuiz oc'h atao, Anna?"
 (Rak ne lavare ger); hag e bern o koueza
 Neuze en e zaouarn: "Al lestr a zo kollet
 "Na soñjit mui ennañ, ho kalon zo dallet
 Perag en em laza, hag euz ho pugale
 Ober emzivaded a-grenn hag heb dale?"

--"Oh! me ne soñjen ket en dra-ze, emezi,
 "Pa glevan o mouezion, n'ouzm perag em zi,
 "Em gavan dilezet, va unan, heb skoazell."
 Ha neuze Philip Ray a gomzas, o sevel:
 "Va selaout, Anna, eun dra zo em spered
 "Abaoe pell amzer, ha ma ne ouezan ket
 "Peur ez eo deut eno, gouzoud a ran ervad
 "E ranko dond er maez abred pe ziwezad.
 "Deg vloaz 'zo eo aet kuit, Anna. Goude keit all,
 "N'eus doare e ve beo, perag c'hoaz e c'hedal?
 "Mad, va lezit da gomz, va c'halon 'ya bihan
 "Ouz ho klewoud ken paour, en dienez, er boan,
 "Hag heb gelloud rei d'eoc'h ar skoazell a garfenn.
 "Nemed... c'hwil... ar merc'hed 'zo buan da gompren,
 "Marteze c'hwil oar mad: med ne anzavoc'h ket,
 "C'hoant bras am eus, Anna, e vijec'h va fried,
 "Evid ho pugale me a vije eun tad;
 "Ma ne fazian ket, me gred am c'haront mad.
 "Evidoun-me o c'har evel ma vijent d'in.
 "Ha ma vezit va gureg, m'ho peus truez ouzin,
 "Goude bloaveziou tenn, leun a dristidigez,
 "Ni a c'hellfe kaoud c'hoaz eürusted er vihez.
 "Grit mad ho soñj, Anna, me zo brao va zraou,
 "N'emeus ket a gerent hag ouz den ne ran gaou,
 "En em anaoud a reom pell a zo, c'hwil ha me,
 "Me ho karia Anna, hogen na ouiec'h ket,
 "Va naon a garantez morse n'eo bet torret."
 -- "Philip, eme Anna, gant teneridigez,
 "C'hwil zo bet an ael mad war-dro va ziegez,
 "Ha bemdez em fedenn, me c'houlenn, ouz Doue
 "Gwelloc'h gopr evidoc'h eged ma vijen me,
 "D'Enok em oa roet va c'harantez a-bez.
 "Kredit mad, va mignon, em-eus ouzoc'h truez,
 "Koulskoude aon am eus na vijen da damall
 "Ma c'hellfen, war e lerc'h rei d'eoc'h-c'hwil kement all."
 --"Beza karet hebken eun tamm en e c'houde
 "A ve c'hoaz, emezan, eur gopr evidoun-me."
 --"Oh! Philip, emezi, evel p'he dije spont,
 "Gortozit eur pennad... Enok a c'hellfe dond...
 "Nann, ne zistroio ken... med gedit kement-se,

"Daoust ha ne c'hellit ket? Eur bloavez n'eo ket re?"

—"Pegwir am eus gedet a-hed va oll buhez,

"E c'hellan, emezañ, gedal c'hoaz eur bloavez."

—"Nann, nann, liammetoun, emezi... a-benn bloaz."

—"Mad, emezañ, d'ho youl, Anna, me c'hedo c'hoaz."

O daou e chomjont sioul, med Philip o sevel

A welas o tiskenn, a-dreñv kern ar grugell,

An heol kollet gantañ hag e c'hor hag e sked.

Neuze ec'h hopas kreñv. Ar vugale d'ar red.

A deuas euz ar c'hoad gand o fanneradou

Krañ dastumet ganto, lorc'huz gand o madou.

Philip a ambrougas Anna beteg he dor.

Neuze en eur ginnig d'ez e zorn digor

E lavaras: "Anna, bremaig du-hont, er c'hoad,

"Ho kalon he deus bet eur fallaen moarvad.

"N'ho poa ket ho frankiz pa rojoc'h d'in ho ker;

"Me a chomo liammet bepred en ho keñver;

"Met c'hwiz zo diere. Heb beza war hoc'h hent

"E roin skoazell d'eoc'h evet a ziagent."

—"Nann, emezi, Philip, me a zo liammet."

En nozvez-se eta, Anna he doa korzet.

Hogen epad m'edo o lakaad urz en ti

Ha ma soñje er gomz neuze klevet ganti:

"En doa he c'haret pell hag hi n'her gouie ket."

Evel en eun huñvre ar bloaz oa tremenet.

Ha Philip, eur wech c'hoaz, a oa dirag he dremm.

He ger he doa roet ha n'he doa ket da glemm:

"Daoust ha bloaz a vefe, emezi, sec'h he staoñ."

—"Eur bloaz zo, emezañ, ma 'z eo dare ar c'hrañ.

"Deut ganen da weloud." Med hi a argilas:

"Kement-all da ober... eur seurt kemm... Eur miz c'hoaz."

Eur miz a c'houlenne, eur miz, ha netra ken.

Hag euz a viz da viz e pellae an den,

Ha Philip a blege d'he youl... "Mad eo, Anna,

(Hag e galon, ennañ, oa dare da ranna)

"C'hwiz sibabo ho pred." Hag Anna dre druez

He doa c'hoant da ouela evitañ, ar paourkaez;

Koulskoude e klaske bepred digareziou

Evid pellaad an eur; evelse ar miziou
 Euz ar bloavez nevez a denne d'o hanter
 Hag an den paour atao a c'hede en aner.
 An teodou 'yae en-dro... Lod o doa lavaret:
 "Araog gouel an Oll-Sent e vezint dimezet."
 Heg evel ne oant ket, a youc'he war an daou
 Evel m'o dije graet ar re-mañ outo gaou.
 Hervez lod all, Philip a rae goap anezi,
 Eur rummad all a grede gouzoud mad heb fazi,
 E c'hoarie koumañ gantañ d'e higenna
 Ha d'e zerc'hel gwelloc'h a-ze. (Paourkaez Anna!)
 Darn c'hoaz o c'hemere evid daou zianteg.
 N'ouient ket mad a-walc'h euz petra oant c'hoanteg.
 Unan euz an dud-se hag a varn atao fall,
 Hag a soñj ar gwas diwar-benn ar re all,
 E-noa c'hoant lavared ha da gredi e traou
 Da lakaad tud onest dioc'h eged ar glaou.
 He mab d'ez, beteg-neuze oa chomet sioul,
 Hogen en e lagad e c'helled lenn e youl.
 Ar verc'h avad, bemdez a boulze start he mamm
 Da zimezi d'an den e-noa tennet eur samm
 Ken pounner diwarni, p'edont o vond da goll,
 Hag a rentje eüruz eun den a garient oll.
 Ha Philip, drouglivet, bemdez a gastize,
 E galon er c'hlae'har atao a c'hortoze.
 Anna en em gave kabluz a gement all,
 Ha pa soñje, n'helle miroud d'en em damall.

Eun nozvez, kaer'he doa, dic'halloud da gouskad,
 E-kreiz an noz teñval, digor he daoulagad,
 Anna baour a soñje en Enok he fried;
 Abaoe o c'himiad n'he doa kelou ebed.
 Ah! gouzoud difazi p'ez oa maro pe veo!
 Rag chom en entremar n'eo ket eur vuhez eo:
 "Eur sin, o va Doue, me a c'houlenn eur sin,
 "Eun arouez bennag; bezet truez ouzin!"
 Ne c'hellas ket pelloc'h gouzañv spont hag anken
 He c'halon, en noz du: Evid kaout sklerijenn
 Ec'h enaou ar goulou, ha neuze o sevel
 E red d'an daol vihan a zoug al Leor Santel;

Mall ganti da c'houzoud, hi hen digor gand tiz
 Hag a lenn ar gerioù a zo dindan he biz:
 "Dindan ar balmezenn". Netra ne gomprenas,
 Hag e kloas neuze al Leor hag e kouskas.
 Kerkent e wel Enok dindan eur balmezenn,
 Azezet eo, an heol a zo a-zoe'h e benn.
 Ha ragtal e soñjas: "Maro eo, setu heñ
 "O kana 'n Hozannah, eüruz e barr an Neñv.
 "Eno e par an Heol, an Heol a santelez.
 "Ar balmezenn amañ eo skeudenn ar palmez
 "A lede ar bobl eüruz, gwechall, eme Anna,
 "A zirag Mab David, pa ganent Hozannah."
 Neuze e tihunas. Disannet oa a-leiz,
 Rag graet he doa he soñj, hag araog goulou-deiz
 E reas gervel Philip: "Netra ken, emezi,
 "Ne c'hell miroud ouzom bremañ da zimezi."
 -"Ma roit d'in ho torn, ra vezo disale,
 "Keit all 'zo, emezañ, an amzer a vale."

Eureujet e voent 'ta; ha son drant ar c'hleier
 A dregernas er porz ha dreist ar parkeier,
 Drant ha laouen, en aer, ar c'hleier a sonas,
 Hogen kalon Anna gand dudi ne dridas.
 Ouz he heuilh, pa gerze, e kleve kammedou
 Heb gweloud den ebed o tond war he roudou;
 Eur vouez en he skouarn hag a gusulike,
 Mouez piou? euz a belec'h? her gouzoud ne c'helle.
 M'oa ket evid gouzout chom he-unan en ti
 Ha dond er maez ive a oa spont eviti.
 He biz a chome pell, pell war liked an nor,
 Araog poueza warnañ da rei d'ezhi digor.
 Pe seurt droug oa hennez? Philip a soñje mad
 E oa boaz d'an droug-se ar gwragez en he stad,
 O veza dougerez: pa c'hanas he bugel
 E kavas ar pare e kichen e gwell.
 Adarre e oa mamm, an anken a dec'has
 Ha Philip a voe oll eviti, eur wech c'hoaz.
 Hag Enok e pelec'h edo d'ar mare-se?
 Pignet e bourz al lestr: "Digouez mad" e treuze

Mor braz ar c'hornaoueg da vond d'ar broiou pell,
 Gweloud a reas Eusa, ha douar Breiz-Izel,
 Ha daoust d'eur wagenn greñv e tremenâs ar Raz
 Dibistig diouz ar roc'h, heb droug ebed, na gloaz.
 Hogen en em gavet e pleg-mor Biskaya,
 E-lec'h ma 'z eo an tonn droug ha rust peur vuia,
 Al lestr a voe darbet d'ezañ mond d'ar goueled.
 War eur mor habaskoc'h gand an avel poulzet,
 En doa risklet neuze a-dreuz ar c'helheder
 Araog ober an dro da Veg ar Gwall-Amzer.
 Bremañ gand eur mor sioul, bremañ gand eur mor fall,
 Al lestr a zerauas da bignad en tu all,
 Hag evid an eil tro a drôc'has kalc'h ar bed.
 Eun avel vad, paduz, neuze her blein a-hed
 An enezennou Aour, e broiou ar Reter,
 Beteg m'en em luskas, ouz an eor, en aber.

Enok a reas kenwerz evitañ e unan,
 O treki traou e vro ouz donvez ar Yun-Nan;
 Gwiadennou seiz kaer, flour d'an dourn, d'ar goueled,
 Annezouigou prenn lifret ha marellet...
 Ouzpenn e prenas c'hoaz braoigou olifant,
 Aerevent alaouret, stummet, kizellet koant,
 Gand hanafiou pri gwenn, ive eur Boudha-deo
 E zaoulagad a-dreuz ha blañsonet e vleo;
 A raje plijadur er gêr d'ar vugale.

Al lestr oa karget, ha n'oa mui da zale.
 Hogen treiz an distro voe disheñvel a grenn
 Ouz an hini da zond; eur sizun penn-da-benn
 Ar mor habask ha sioul oa a-vec'h roufennet
 Dirag skeudenn ar staoñ, ken ledan kerc'hennet;
 Ha neuze deizioù leun heb begad avel,
 Gand kaouajou hedro warlerc'h o tilemmel;
 Goudeze avelioù tu-eneb o c'houeza,
 Erfin ar skrijusa barr-amzer da gloza.
 Kerkent mouez ar gedour: "Ar c'herreg" ha ragtal
 Eur strakadenn spontuz, eur youc'h... Graet eo ar stal.
 Al lestr a zo flastret, o vadou aet da goll,
 E dud nemed Enok ha daou all beuzet oll.

An hanter euz an noz krog er paramañchou,
O zri o doe da stourm ouz kounnar an tarziou;
Ha war ar wern torret, poulzet gand al lano,
Dare gand ar skuisder, ouzpenn hanter varo
E touarjont o zri, pa deuas ar mintin,
War eun enezennig pinvidig ha lirzin,
Eun enezenn zistro, dizarempred siouaz!
Pell diouz peb douar all e donder ar mor braz.

Amañ an den ne oa en diouer a netra:
Frouez c'houek ha kraoñ teo, gwrizioù mad da vaga,
Ive anevaled hag a oa ken gouez
Ma ne zifizient tamm euz an amezeged,
Hag evel loened doñv ma vodent en dro d'eoc'h;
Truez e vije bet lakaad reuz en o feoc'h.
En eur fraill, er menez, a selle ouz ar mor,
Gand deliou gwez palmez, da rei d'ezo goudor,
E savjont eul logell gouezidi;
Hanter logell hag hanter geo: setu o zi.
Er baradozig-se, pinvidig a bep tra
An dud paour peñseet a c'helle brao beva
Ma ne vijent bet pell diouz o zud hag o bro.
Daoust hag i a c'hellje o gweloud c'hoaz en dro?
Nann, ne oant ket eüruz, rag unan euz an tri
Eur c'hrennard, netra ken, ginidig a Gumri
A oa bet, er peñse, gouliet da vervel
Hag a badas pemp bloaz, penaoz hen dilezel?
A-vec'h emañ maro, an daou a oa chomet
En em gavas dirag keñ eur wezenn gouezet
Hag en eur glask kleuza ar c'hef-mañ gand an tan
Evel m'o doa gwelet er broiou indian,
Mignon Enok, siouaz, ouz ar c'hor dievez,
A bakas eun taol heol, diwar goust e vuhez.
Enok e unan kaer war eun enezenn bell
A soñj d'ezañ klevoud Doue ouz e c'hervel
Dre an daou varo-se: en e skouarn, en noz,
Eur ger a son bepred, eur ger hebken "Gortôz".

Ar menez gwezennet tre beteg e gribell,
An hent war ziribin a ra kant troidell

Hag a seblant bleina d'an Neñv dre an oabl glaz;
 Al letonenn ledan ha flour war ribl ar waz;
 Ar gwez "coco" uhel gant eur bouch en o fenn;
 Nijadenn luc'heduz ar c'houil, ar c'houibuenn,
 Hag hini al labous; lufre ar plantennou red
 Speguz evel iliaou; gouriz ledan ar bed
 En e c'hor hag e sked; an traou-se a welas.
 Hogen gweloud ar pezh a glaske ne c'hellas:
 Dremm hegarad an den, na klevoud e vouez c'houeg
 O prezeg yez an dud d'e galon davanteg.
 Klevoud a reas avad youc'hadeg evned-mor
 O trei a-zioc'h e benn, en aer, e-kreiz ar c'hor,
 Ha trouz ar wagenn hir o tarza war ar roc'h
 Ha goudrouz ar gurun ne vez ket pounneroc'h;
 An avel o sourral er gwez uhel, ar froud
 O tiredeg d'ar mor. Hag Enok a hirvoud
 E-unan war an aod, pe c'hoaz en e logell
 A-zioc'h ar mor braz, hag e c'hortoz eur ouel.
 Hogen, a zeiz da zeiz, gouel ebed war ar mor,
 Ha bep devez an heol en e sked, en e c'hor,
 A vann e virou ruz a-dreuz ar gwez palmez,
 Ar radennou uhel hag an islonk gouez.
 Euz kostez ar sav-heol an tan zo war ar mor;
 E tu ar c'hornaoueg atao an tan, ar c'hor,
 Gant e saezennou tan an heol a-zioc'h e benn
 War an enez a skuill eur mor a sklerijenn;
 En noz ar stered braz, en oabl oc'h enaoui,
 Ha mouez pounner ar mor buan da gounnari,
 Hag atao birou tan an heol ruz o sevel,
 Hogen e zaoulagad ne welont ket eur ouel.
 Enok a zo war c'hed, pe a seblant beza,
 Ken sioul ema eno, ma teu da ziskuiza,
 Ar glazard alaouret, heb aon, war e varlenn.
 Eun teuz, graet a gant teuz, a red dirag e benn;
 E unan, en e soñj, e klask an Enezenn,
 Eun douar teñvalloc'h, en tu all d'al linenn;
 Bugale o fistill, Anna, an ti bihan,
 Ar vilin hag ar straed a bign, ar wezenn dan,
 Ar gwenojennou glaz, an ivinenn end-eein
 Dirag dor ar c'hastell, touzet e stumm eur peñn,

Ar gazeg a vleine, hag ar vag a werzas,
An tevenn leiz gand ar vorlusenn e c'helpias,
Nozvezioù fresk miz du, c'houez an delioù gwenvet,
Ar barr glao, klemmadou ar morioù droug-livet.

Eun deiz, en doare-se azezet o soñjal,
Son kleier e barrez, a glevas o voudal
Goustad en e skouarn: ya, goustadig ha pell.
Neuze en er grenn voe ret d'ezañ sevel
Ha bale evid mond ne ouie da belec'h,
Hogen pa zistroas e spere, evel dec'h
E velas adarre gand e zaoulagad noaz,
An enez kasas kaeroc'h eged biskoaz.
Ma n'en dije neuze e galon baour komzet
Gand an Hini n'en deus morse c'hoaz dilezet
An neb a gred ennañ evel mab en e dad,
Ennañ en dije bet kollet e skiant vad.
Gand reo ar bloavezioù penn Enok a wenne,
Glaorieier, amzer vras beb eil a dremene
Heb digas kemm ebed en e stad reuzeudig,
Hogen atao e-noa eur fizians virvidig
Da weloud c'hoaz e vro, e wreg, e vugale,
Pa deuas ar skoazell goude ker bras dale.
Eul lestr all hag a oa poulzet diwar e hent
Evel an "Digouez mad" bloavezioù diagent,
Gand an ezomm dour fresk, dirag an enezenn
A deuas da eoria eur pennad, o tremen.
Rag an eil kabiten, kerkent ha goulou deiz
O veza merzet dour o tiruill euz a greiz
Eun dorgenn roufennet, en doa douaret tud
Da glask an eienenn. Evel n'oant ket mut,
Ec'h hopent en eur vond an eil ouz egile.
Neuze euz e logell er frailh e tiskenne
Eun den whisket iskiz, hir e varo, e vleo,
Hag hekleo ar mouezioù 'zo deut betek e geo.
Lavared e vije eur paour kaer dianteg
O c'hrumuzad gerioù distum hag heb meneg,
Hag evel pa vije ar gounnar en e sell
O klask rei da entent eur youl vras, ha ne c'hell.
Beteg ar gwasioù dour an den paour koulskoude

O bleinas difazi, hag war bouez o c'hlevoud
 E deod pell liammet a gavas e c'halloud.
 P'o doe graet o leun-zour her c'hemerjont ganto.
 War bourz al lestr e reas an danevell d'ezo,
 En e gomzou draillet, euz an traou c'hoarvezet:
 Ar peñse, e vuhez abaoe, hag e c'hed.
 Tud al lestr da genta, eun tammig diskredig
 A santas o c'halon teneraet prestig,
 Hag e rojont d'ezan dilhad d'en em c'holo.
 Ha digemer digoust evid distrei d'e vro.
 Aliez, evid kaoud berroc'hig an amzer
 E kinnige d'ezo an dorn en o micher.
 Euz e gornig douar, pa glaske kaoud kelou,
 Nikun n'en doa respont ebed d'e c'houlennou,
 Rag nikun anezo ne deue euz e vro;
 Hag, hed an hent, e benn voe teñval meur a dro.
 Gwall lugud oa al lestr d'ober hent hir war vor
 Med e spered a nij arag war-zu e zor,
 Du-hont er porz bihan; pegement e tale
 Ar pred ma welo c'hoaz e wreg, e vugale...
 Eun nozvez kouskoude (al loar a oa kuzet)
 E benn en e zaouarn, war ar pont azezet,
 Enok a rufas kreñv êzenn ar prajou leiz.
 Dreist ar c'houriz kerreg a ra tro Enez-Vreiz.
 Pa deuas ar mintin an oll vartoloded,
 Ofiserien ha tud war leur ar pont bodet
 A roas, en eur gest, o skodenn galoneg
 Da sikour o c'henvreur, siouaz ken ezommeg.
 Neuze, a hed an aod, al lestr o vond goustad
 Hen douaras er porz her gwelas o kuitaad.
 En em gavet enc, heb komz ouz den ebed,
 E kemeras an hent war-zu e di karet;
 Eun ti hag eun oaled ha bez en doa c'hoaz?
 Goude keit all e-noa lezet ar gêr, siouaz!
 Ar pardaez a oa sklêr ha yen en devez-se
 Hogen da bred kuz-heol, eur vorlusenn neuze
 A savas war ar mor hag oc'h en em astenn.
 A c'hloas prestig ar porz hag an tevenn.
 An hent braz oa troc'het hag Enok e-noa poan

O kaoud eur venojenn a gas d'e di-bihan.
War skourr noaz eur wezenn, ar boc'h-ruz glac'haret.
A ro c'hoaz da glevoud e gam-melkoniet,
Euz ar bod radenn leiz an dour a zirede.
Hag an deñvalijenn, el-latar, a greske.
Setu pa ziboufas, kerkent, eur sklerijenn
A skedas dirazañ a-dreuz ar vorlusenn,
Hag ec'h en em gavas war al lec'h a glaske.

En eur vale goustad evel eul laer neuze,
(Evel p'en dije bet gedet ar peb gwas).
E sell war vein an ti a c'houdore Anna
Hag e vugale ger-ganet er seiz vloaz-se
M'o doa bevet eüruz an eil gant egile,
E tiskennas ar straed hag e tizas an nor.
Hogen eno ne gav na sklerijenn na gort,
Rag aet eo kuit an dud, eur skritell a ra perz.
D'an neb en dije d'hoant: emañ an ti e gwerz.
Neuze e kendalc'has da ziskenn ar straed hin:
"Maro int, emezañ, ha ma-vevont eo gwir
Int maro, kement-se, me lavar evidoun."
Hag en eur mor glac'har 'voe beuzet e galon.
Diskenn a reas d'ar porz, eno war eur c'hae strizh
E klaskas eun davarn bet en e yaouankiz
Darempredet gontañ: an tal e-giz gwechall
Graet e treustou kroaziet, preñvedet ha ken fall
Ma soñje da Enok e oa marz e vije
An ti c'hoaz en e sav: mad, gweloud a raje.
An ti a chome c'hoaz, an hostiz 'oa maro.
Hogen e intañvez, Myriam he ano¹,
A gendalc'he atao gant eur gounid dister,
Ma n'eus mui a dabut en ti-mañ, e c'heller
Koulskoude kaoud ennañ eur gambr hag eur gwele.
Enok eno er peoc'h hag er sioulder ive
A c'hellas diskuiza epad meur a zvez.
Myriam, maouez vad, a oa glabouserez
Ha n'hen dilezo ket: en e gambr e teue
War zigarez eun dra pe eun all, ha neuze
E tibune d'ezañ kement nevezenti

Oa c'hoarvezet er porz, gand oll istor e di,
 (Rag Enok oa ken skuit, ken treut, ken kastizet
 Ma ne oa ket souez n'hen anavezje ket.)
 Evelse e klevas maro ar yaouanka
 Euz e dri grouadur; penaoz e wreg Anna
 A gouez en dienez, he foan hag he enkrez,
 Ha penaoz Philip Ray, o kaoud outi truez,
 A ro d'ezhi skoazell, a lak he bugale
 Ar paotr, ar verc'h, er skol, ha penaoz dizale
 E teujont da garoud Philip evel o zad.
 Klevoud a reas ive penaoz emañ, da vad,
 A soñjas dimezi d'Anna, penaoz her pellas
 Euz Eost d'ar Bloaz nevez hag euz Genver da Vae,
 Penaoz goude keit all heb kelou euz he gwaz,
 O soñjal oa maro erfin, e timezas;
 Heg eur bugel oa deut da laouenaad an ti.
 Enok a selaeue an istor-se ganti
 Heb diskouez war e zremm displijadur ebed,
 Ha seblantoud a rae lakaad evez, n'eo ket
 En istor-he-unan, med e chaog ar vaouez.
 Hogen pa zigouezas da Vyriam paouez,
 Emañ a lavaras: "Enok, ar paourkaez den
 "A zo bet taolet kuit, ha kollet da viken."
 Hag ec'h hejas e benn; ar vaouez eur wech c'hoas
 Ar geriou: "taolet kuit ha kollet" a glevas.
 Med Enok e-noa mall gweloud he dremm d'ezhi.
 "Oh! ma c'hellfen hebken he gweloud en he zi
 "Ha gouzoud eo eüruz, emezañ..." Ha bepred
 Ar soñj-se a hente, a zovanie e spered.
 Deiziou teñval miz Du d'ar pardaez her bleine
 Beteg lein an dorgenn, ac'hano e wele
 Kement tra a zindan; hag eno azezet
 E soñje en amzer ha na zistroje ket.
 Beb an amzer, Enok, diwar lein e dorgenn
 A wele o lintra du-hont eur sklerijenn
 O tond euz ti Philip; hag ar sklerijenn-se
 E denne daveiti hag e vezevenne
 Evel m'ho peus gwelet al labous tremenour
 Chachet, evid e goll, gand sklerijenn an tour.
 Ti Philip war ar straed a oa troet e dal,

Hogen war an a-dreñv, eul liorzig, padal
 A gase, dre eun draf, euz an ti d'ar mêziou.
 Hag al liorz a oa klozet gand mogerioù.
 Eur wezenn a oa ennañ, koz braz, eun ivinenn.
 Eur wenojenn groumm tro-dro a rae bevenn.
 Eun alez a droc'he e daou al liorzig.
 Enok, evel eul laer, en em silas sioulig
 A-dreñv an ivinenn hag a-hed ar voger;
 Hag ar pez n'en dije morse dleet ober
 (Ma vije bet e stad da zibab ar gwella)
 Ac'hano e welas:

Er sal, er c'horn pella,
 War eun arnez lufret ez eus listri arc'hant
 Hag hanafioù a briz, a rae an ti-se drant;
 Tan kaer oa en oaled; en tu dehou azezet
 Philip Ray, ar c'harour, bet gwechall dilezet,
 Den kreñv ha livet mad, e vab war e varlenn,
 Ha war skoaz he eil tad, eur verc'h, he bleo melen,
 Heñvel ouz Anna Li, yaouankoc'h ha kaeroc'h,
 A zo harpet bremañ, ha netra n'eo koantoc'h
 Eged gweloud he dorn oc'h heja eur ruillenn
 Dirag dremm ar bugel, e beg eul lietenn,
 Hag emañ o c'hoari gand e vrec'higou kuill,
 Na, kaer e-neus, o vond atao a-biou d'ar ruilh.
 Ha neuze e c'hoarzent; hag a-gleiz d'an oaled,
 Enok, ar paourkez den, en deus ive gwelet
 Ar vamm, he sell troet war-zu he c'hrouadur.
 Houmañ beb an amzer a dro gand plijadur
 Da gomz gand unan all, he mab, en he c'hichen,
 Eun den yaouank seder, kreñv evel eun dervenn.
 Ar pez a lavare n'en diaeze ket tamm
 Rag heñ a vouze hoarze en eur selaou e vamm.

Bremañ an den maro, deut adarre da veo,
 O weloud e bried n'eo mui e bried eo,
 Hag ar bugel yaouank 'zo krouadur d'ezhi
 Heb beza mab d'ezañ, eur gwaz all en e di;
 Pa wel an oaled tomm, ar peoc'h, an eürusted
 A zo eno, pa wel (o pegement kresket,
 Ha pegen kaer ive) e verc'h, e vab d'ezañ,

Ha Philip Ray o ren e diegez bremañ,
 Oh! neuze, daoust m'en doa klevet an istor oll,
 Enok a sant bremañ e benn o vond da goll,
 Rag muioc'h a c'halloud o deus an traou gwelet
 Eged an danevell anezo selaouet.
 An den paour a grenas, e gorv a horjellas.
 Neuze evid miroud da goueza, e krogas
 E skourr ar wezenn c'hlas; koulz en dije bet
 Poulzet eur youc'hadenn skiltruz ha pulluc'het
 Eürusted eun tiad, en eur predig hebken.
 Evid na vije ket anavezet, an den
 A zistroas sioulig, evel eul laer dre guz.
 Evid tizoud an dref, heb trouz ebed, a ruz;
 Didrouz, evel ma vez graet avid eun den klañv,
 E tigoras neuze hag e klozas houmañ.
 Eur wech war ar maeziou, en dije daoulinet,
 Hogen e zivesker diners na blegent ket,
 Hag Enok a gouezas a stok-korf d'an douar.
 Ne c'hell en em viroud da glemm hag e lavar:
 "Re boaniuz da c'houzañv. Ah! perag n'e deus ket
 "Va dilezet du-hont er penn all euz ar bed?...
 "Doue oll c'halloudeg, o Tad karantezuz,
 "A zo deut d'am skora du-hont, Salver Jezuz,
 "Deut eur pennadig c'hoaz d'am skora, d'am herpel,
 "C'hwil ne zinac'hit ket d'an den paour ho skoazell,
 "Ha roit d'in an nerz da chom heb komz outi,
 "Ma vevo heb gouzoud, ma vo ar peoc'h ganti.
 "Va bugale ive, n'am anavezont ket...
 "Oh! karoud a rafen beza outo komzet.
 "Hogen en em ziskuil a rafen, me oar mad.
 "Nann, ne c'hellan ket rei d'ezo eur pok a dad,
 "D'ar verc'h a zo hirio ken heñvel ouz he mamm
 "Ha d'ar paotr, eñ va mab... Nann, nann ne gomzin tamm."

Neuze Enok o koll e anaoudegez vad,
 A jomas eno sioul ha difinv eur pennad.
 Pa deuas nerz d'ezañ adarre da sevel
 Ha da gerzoud d'e gambr, goustad euz e vuzell
 Ar geriou-mañ a gouez e doare eun diskant:
 "Chom heb prezeg outi, chom e kuz va unan."

Koulskoude ne oa ket reuzeudig-oll a-grenn,
Graet mad e-noa e soñj; harpet war ar bedenn,
Hag e feiz virvidik, Enok a gave eno
Eun eienenn dour fresk, a-dreuz ar mor c'houero,
Hag a ro d'e ene, evel buhez nevez.

Eun deiz e c'houlennas digand an ostizez:

"Maouez ar miliner daoust ha n'he deus hi ket

"Aon na vije, eun deiz, he fried koz kavet?"

"Aon awalc'h, ar wreg baour, a respont Myriam,

"Ha diwar he spered c'hwi a dennfe eur samm

"Ma c'helljec'h lavaroud ho peus c'hwi her gwelet

"Maro-mok e pell-bro, ha ne zistroio ket."

An den paour a soñjas: "Pa vezo deut Doue

"D'am gervel davetañ, hi a ouezo neuze,

"Gortoz a ran e bred."

Enok hiviziken

(Rag ne fell ket d'ezañ goulenn an aluzenn)

A ranko klask labour evid gelloud beva,

Rag dornet mad e oa: gouzoud a rae krava,

Ober labour ar gov koulz hag ar barazer

Kalvez e oa d'e eur; pa veze gwall amzer

E rae gwechall, er gêr, rouejou pesketa,

Gounid a oa ive o karga, diskarga

Ar bigi a deue d'ar porz en amzer-se:

Gounidegez vihan, daoust ma n'e-noa neuze

Da labourad nemed evitañ e-unan.

Al labour-se n'oa ket diouz eun den eveldañ.

N'oa ket klozet ar bloaz abaoe e zistro

Ma kouezas ar c'hleñved, daoust m'edo en e vro;

Eur c'hleñved a langiz, eur c'hleñved aes, diboan,

Hag a lakaas an den a nebeudou ker gwan

Ma ne c'hellas prestig ober labour ebed.

Derc'hel a reas an ti, hag e-berr voe barnet

Da chom war e gador: n'oa mui evid bale,

Beteg ma renkas chom ledet war e vele.

Enok a c'houzañvas e stad, laouen meurbed;

Eun den, en eur peñse, n'en deus morse gwelet

Gand eun tal laouenoc'h o tostaad ar skoazell

En e stad, eun den, eun den, eun den,

En e stad, eun den, eun den, eun den,

En e stad, eun den, eun den, eun den,

En e stad, eun den, eun den, eun den,

Eged na welas heñ, d'ar red o tilemmel,
Ar maro gand e falc'h da gloza e vuhez,
Rag ar pezh a roe d'e galon levenez
'Oa soñjal e c'hellje, goude na vije ken,
E bried her gouzoud, heb gaou ebed da zen
En devoa he c'harret en doare tenera
A-viskoaz, ha beteg e zevez diweza.

Gervel a reas neuze an ostizez d'e gaoud:

"Tostait, emezañ, ma roin d'eoc'h da anaoud,

"Maavez, eun dra a-bouez hag a dle chom kuzet

"Beteg ma vo va c'horv douaret er vered.

"Med touit da genta war ar Skritur Santel

"E lakoc'h evez mad hag e ouezoc'h tevel."

-"Er vered? emezi, piou eo a gomz aze?

"Ni ho lako, va den, war ho treid adarre

"Ha sonn, me lavar d'eoc'h." - "Touit, emezañ c'hoaz,

"Ha war al leor." - Spontet, Myriam a douas.

Neuze e c'houlenmas diganti diroufenn.

"Daoust hag anavezet ho peus Enok Arden?"

-"Ya, emezi, gwechall, her gweloud a ran c'hoaz

"O tiskenn ar straed hir, hennez a oa eur gwaz

"Ha sonn e benn gantañ rag n'en doa son ouz den."

-"E benn a zo stouet hag an dud n'o deus ken

"Doujañs ebed d'ezañ, eme Enok, me eo,

"Ha me soñj n'em eus mui tri devez da chom beo."

-"N'eo ket gwir, emezi, diskredig, c'hwit Arden?

"Ouspenn eun troatad mad e-noa warnoc'h, va den!"

Enok a respontas: "An hirmez, hag an doan

"O deus krommet va c'hein, pa veven va-unan;

"Koulskoude gouezit mad, me eo a oa pried

"D'an hini a zo bet abaoe dimezet

"D'ezañ, da Philip Ray. Azevit ha klevit."

Ha neuze e kontas d'ezñ penaoz 'oa aet kuit

Euz ar gêr war eul lestr, hemañ a reas peñse,

Ha penaoz saveteet e vevas goudeze

E-unan war zouar eun enezenn zistro

Ha penaoz eul lestr all hen digasas d'e vro;

Penaoz e zaoulagad o doa gwelet Anna

E diabarz an ti, e galon o ranna

E-noa graet mad e soñj neuze, hag abaoe
 E-noa dalc'het d'ezañ, skoazellet gand Doue.
 Ar vaouez hag a oa buan da skuilha daerou
 A zirollas ragtal, o klevoud e gomzou.
 Aet e vije ken trumm dre ar porz hag ar vro
 Evid embann d'an oll e oa Enok Distro.
 Kerkent e voe spontet gand ar soñj euz he le,
 Hebken e lavaras: "Enok, ho pugale,
 "Va list da vond d'o c'hask, da gimiada diouzoc'h."
 Hag e savas gand tiz hag heb gortoz pelloc'h.
 Enok, eñ, a chomas da soñjal eur pennad.
 Neuze e respontas: "Nann, Maouez, va mennad
 "A dleam kas da bern, ha n'am zrubuillit ket.
 "Azevit ha klevit, na gollit ger ebet,
 "Epad ma c'hellan komz; me ro d'eoc'h kefridi.
 "Da vond pa ne vin ken, da lavaroud d'ez
 "Em eus he c'haret mad hag ez oun tremenet.
 "En eur rei va bennoz d'ez, va gwir bried;
 "E pedan eviti, hag e c'haran atao,
 "Kerkoulz hag an deiziou m'edom on daou ker brao
 "An eil gand egile; hag Annaig va mero'h
 "Ken heñvel ouz he mamm; ha va mab, war he lerc'h,
 "A vennigen ive, evito e pedan.
 "Livirit da Philip ive her bennigan.
 "Morse n'e-neus klasket evidom nemed mad.
 "Ma fell d'am bugale gweloud c'hoaz dremm o zad
 "Eur wech ma vo maro, lezit-i da zond,
 "Rag va bugale int, ken nebeut ma c'hellont
 "Derc'hel soñj ac'hanoun. Hogen hi ne dle ket
 "Doned beteg amañ, rag va dremm distronket
 "Gand droug-liv ar maro a vije eviti
 "Beteg kloz he buhez, evel eun teuz en ti.
 "Ha bremañ er bed all, unan zo euz va gwad,
 "P'en em gavin eno, a c'hello d'in pokad;
 "Ar bleo-mañ zo e re, hag hi eo o zroc'hoas
 "Evid o c'hinnig d'in; warnoun me o dougas
 "'Hed ar bloaveziou-mañ, ha da fin va buhez
 "Va soñj oa beteg-heñ, o c'has ganen d'ar bez.
 "Hirio eo disheñvel: me welo va bugel
 "E kreiz an eürusted er vuhez eternal.

"Kemerit ar bleo-mañ, hag o roit d'ezi;
"Pa vezin-me maro, evid he frealzi,
"Hag ouspenn, ar bleo-mañ a vo eun arouez,
"Eviti, e oan-me Enok e gwirionez."

Ehan a reas da gomz - E riskl koll e alan
Gand kement a c'heriou distaget ker buhan.
Myriam a roas he ger hag a douas,
Ma tistroaz Enok e lagad warni c'hoaz,
O lavaroud e youl adarre penn-da-benn.
Myriam a roas d'ezañ he ger da beb goulenn.

Hogen d'an trede noz goude an oll draou-mañ,
Enok 'oa morgousket, dinerzet oll bremañ.
Myriam o veilha, d'he zro a vorede,
Pa deuas euz ar mor, ker kreñv ma tregerne
A-dreuz ar porz a-bez, skiltrusa garmadenn
A voe klevet biskoaz. Kerkent Enok Arden
Voe dihun, ha gantañ, e zivrec'h frank digor,
E youc'has kreñv: "Eur ouel, eul lien war ar mor.
"Setu me savetaet." Hag a-dreñv e kouezas
Heb mui lavaroud ger.

Evel-se e varvas

Eun den kreñv ha kadarn. En deiz ma voe beziet
Eur bobl hen ambrougas d'an douar benniget,
Kaeroc'h kañv e neb lec'h voe lidet da zen
Hag ar c'houn euz an dra a bado da viken.

GWENNAEL.